

Parlez breton
au bistrot !!

KOMZIT BREZHONEG EN OSTALERI




WARENGHEM
distillerie depuis 1900
ARMORIK
Whisky Breton
SINGLE MALT



MONT E-BARZH / ENTRER DANS LE BISTROT

Salud deoc'h tudaù ! Salut à vous bonnes gens !
 Demat dit ! Bonjour à toi !
 Penaos 'mañ kont ganeoc'h ? Comment allez-vous ?
 Derc'hel da vont, ha ganit ? Ça continue, et toi ?
 Pa vez leun e gof 'vez ront ! N'eus ket da glemm !
 Quand le ventre est plein il est rond ! Il n'y a pas à se plaindre !
 Hag a nevez er bourk ? Quoi de neuf dans le bourg ?
 O pas kalz tra, traoù kozh tout !
 Oh pas grand chose, que des vieilles choses !

*Hemañ n'en deus ket ur penn
 da lipat chadenn ar puñs !*

*Celui-ci n'a pas une tête à sucer de la glace ! (lécher la chaîne du puits)

GOULENN DA EVAÑ COMMANDER À BOIRE

Ur bannac'h 'po ? Vous aurez un coup à boire ?
 O, ya gant plijadur ! Oh, oui avec plaisir !
 Petra 'po da evañ neuze.
 Qu'aurez-vous à boire alors ?
 Lak ur werennad gwinn din, mar plij.
 Mets-moi un verre de vin, s'il te plaît.
 Evel kustum ? Comme d'habitude ?
 Ya, evel kustum, ur bannac'h gwinn gwenn, mar plij
 Oui, comme d'habitude, un coup de vin blanc,
 s'il te plaît.

'to ket ken !

*Tu n'en auras plus !

*Ur sach' goullo ne chom ket en e sav !
 Ur sach' leun ne 'ra ket ivez !*

*Un sac vide ne tient pas debout ! Un sac plein non plus !

KAOZIOÙ A BEP SEURT / CONVERSATIONS

Brav an amzer, hañ ? Il fait beau, hein ?
 Ya 'vat ! A'i eo an hañv ! Oui sûr ! L'été est arrivé !
 Pell'zo 'out 'ba'r vro ? Ça fait longtemps que tu es dans le coin ?
 N'on ket, distro on abaoe pemzekteiz da glask labour.
 Non, Je suis de retour depuis quinze jours pour chercher du travail
 Peseurt micher out ? Quel est ton métier ?
 Baraer on. Ha te ? Je suis boulanger. Et toi ?
 Me zo war ma leve abaoe bloaz bremañ.
 Je suis à la retraite depuis un an maintenant.
 Brav eo dit neuze ! Tu es heureux alors !
 Ya sur, brav eo din met foulet on memestra !
 Oui sûr, je suis heureux mais débordé tout de même !

Butun zo ganit mar plij ? Tu as du tabac avec toi s'il te plaît ?
 N'eus ket siwazh, met tan zo ganin ma kavez peadra gant unan all.
 Non hélas, mais j'ai du feu si tu trouves de quoi auprès de
 quelqu'un d'autre.
 Mersi dit. Bez 'm eus da cheñch dour d'ar patatez (d'ar pesk).
 Pelec'h emañ ar privezioù mar plij ?
 Merci à toi. Il faut que je change l'eau aux patates (au poisson).
 Où se trouvent les toilettes s'il te plaît ?
 E peñ an trepas a-gleiz pe e foñs ar jardin ma n'out ket evit gortoz !
 Au bout du couloir à gauche ou au fond du jardin si tu ne peux attendre !

Petra 'out e soñj d'ober evit an noz ? Que penses-tu faire ce soir ?
 Oaran ket kaer, bez e vo ur fest-noz vras brem'son. Marteze ec'h in
 d'ober un tamm tro, ha te ?
 Je ne sais pas trop, il y aura un grand fest-noz tout à l'heure.
 Peut-être irais-je y faire un petit tour, et toi ?
 Me ne vin ket pell da vont gousket, skuizh-marv on. Pelec'h e vo
 dalc'het ar fest-noz ? Moi je ne serai pas long à aller me coucher, je
 suis crevé. Où se tiendra le fest-noz ?
 E sal ar gouelioù, en tu all d'ar bourk, 'peus ket c'hoant da zont
 ganin ? Dans la salle des fêtes, de l'autre côté du bourg, tu n'as pas
 envie de venir avec moi ?
 Ale, un dro zañs araok mont da gousket ne raio ket droug din, deomp !
 Allez, un tour de danse avant d'aller dormir ne me fera pas de mal,
 allons-y !

YEC'HED MAT / À LA VÔTRE

Yec'hed mat dit / deoc'h ! À la tienne, à la votre !
 Yec'hed mat d'an holl, hemañ zo 'vont da goll !
 Bonne santé à tous, celui-ci va à sa perte !
 Yec'hed d'ho kostezioù ! À votre bonne santé !

Écoutez les enregistrements de toutes ces phrases sur www.tiavro22.bzh

AN EVAJOÙ / LES BOISSONS

- > bier melen : bière blonde
- > bier gwenn : bière blanche
- > bier rous : bière rousse
- > gwinn ruz : vin rouge
- > gwinn gwenn : vin blanc
- > dour-pik : eau pétillante
- > hini-kreñv / kalva / gwinn-ardant : calvados
- > wiski / wiske : whisky / whiskey
- > digor-kalon : un apéritif
- > chistr : cidre

R. PICHARD
 V. SUTTE



PAEAÑ / PAYER

Serret e vo an davarn a-benn pemp munutenn !

Le bistrot va fermer dans cinq minutes !

Pegement eo an taol ? C'est combien le coup ?

Daouzek euro hag hanter-kant. Douze euros cinquante.

Ha ! Izel eo an dour ganin ! Gallout a rafen paeañ warc'hoazh ?

Ha ! Je suis à sec ! Pourrais-je payer demain ?

N'eus ket ezhomm, un ti-bank a zo e-tal an ostaleri, 'teus ket 'met mont da denañ un nebeud bilhedoù !

Pas besoin, il y a une banque en face du bar, tu n'as qu'à aller retirer quelques billets !

Hag ec'h an diouzhtu ! J'y vais de suite !

0,50-hanter-kant, 1-unan, 2-daou, 3-tri, 4-pevar, 5-pemp,
6-c'hwec'h, 7-seizh, 8-eizh, 9-nav, 10-dek euro.

MONT D'AR GÊR / RENTRER À LA MAISON

A'i (erru) eo poent mont d'ar gêr !

Il est temps de rentrer à la maison !

Ya ! Warc'hoazh e vo deiz c'hoazh !

Oui ! Demain il fera jour à nouveau !

Gant an oto out deuet betek amañ ?

Tu es venu jusqu'ici en voiture ?

Ya 'vat, met war ma zreid e tistroin d'ar gêr.


Oui, mais je rentrerai à pied à la maison.

Furoc'h e vo, sur ! Kenavo ar c'hentañ tro !

Ce sera plus sage, en effet ! À la prochaine fois !

Ken 'vit 'n deizioù ha chafis vat deoc'h !

À un de ces quatre et bon courage (à vous) !



Ur bannac'h
all 'po ?

*Vous aurez un autre
coup à boire ?

Illustration: Ralf Piquard et Veronique Sutter / photographie: © Anne-Laure / 22140 Kervin / Coom

Vous voulez apprendre le breton ?

KENTELIOÙ BREZHONEG EVIT AN DUD DEUET

Toute l'année, suivez des cours de breton pour adultes avec Ti ar Vro Treger-Goueloù, la maison de la culture bretonne du Trégor-Goëlo.

300 élèves sur 15 communes du Trégor-Goëlo : Paimpol, Lannion, Tréguier, Plouaret, Cavan, Perros, Trégastel...

Des formules stages, cours du soir, formation longue...

Il y en a pour tous les goûts !

WWW.TIARVRO22.BZH